

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh,
ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

R/ : Ha get ho spered !

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (bis)**

Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion :

Ar beleg : Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

Setu Oan Doue, an hini a lam pec'hedoù ar bed :

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion : Karet ho preuder, hag e vin geneoc'h.

1 Me eo ar bara daet ag an Neñv.(2w) 4 Ma chom ma c'homzoù bev ennoc'h,(2w)
Neb a gred ennon 'deus ar vuhez. Goulennit get feiz, roet e vo deoc'h.

2 C'hwi holl a zo skuizh ha sammet,(2w) 5 'Vel m'en deus an Tad Ma c'haret, (2w)
Dait ha Me 'roay deoc'h nerzh ha kalon. 'Vel-se ivez am eus ho karet.

3 Dait, c'hwi a glask ar wirionez, (2w) 6 Me eo ar vuhez, ar wirionez, (2w)
Ma c'homzoù zo spered ha buhez. An Hent ho kaso betek an Tad.

'Veit kloziñ an oberenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :

An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

R/ : Amen !

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :

R/ : Bennozh da Zoue !

Kan-dibenn : Ô Anna, Mamm Mari, a galon, ni ho ped,

Doc'h pep droug, gouarnit-ni, grait ma vimp holl salvet.

O Mari, rozenn misterius,	Santez Anna, enor deoc'h-c'hwi
Nend eus ennoc'h 'met bravite !	Àr an douar 'vel e lein an Neñv ;
Sterenn dreist an holl lugernus,	Enor ivez d'ho merc'h Mari,
C'hwi e zigor splannder an deiz.	Gwerc'hez bepred ha Mamm da Zoue.



Bep sul ketañ ar miz, overenn da **10e30** e chapel ar Werc'hez.

Overenn da zonet : d'ar 1ⁿ a viz Meurzh.

Da geñver Pardon Stez Anna e vo degemeret an Ao. 'n Eskob Moutel !

Parrez KerAnna

4^{et} Sul ordinal / 1ⁿ a viz C'hwevrer 2026

Kan digor :

Avel hon tadoù, ni vo tud a feiz !

Doue a vo bepred hor Mestr hag hor Roue (2 wezh)

1 Doue a vo bepred Mestr àr pep tiegezh :

Tier Arvoriz 'vo e rouantelezh. (2 wezh)

2 En hon tiegezhioù, sellet 'vo 'vel Roue

Get an tad, ar vamm hag ar vugale.

3 Doue a vo ar Mestr àr hor bugale,

Ma chomo enne dalc'hmat bev er fe(iz).

4 Mar sentont dalc'hmat doc'h gourc'hemenn Doue,

E kavint getañ peoc'h ha levenez.

5 Doue a vo bepred Mestr e Breizh-izel :

Ya, kentoc'h mervel 'veit en dilezel !

Salud d'ar bobl :

Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad

hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :

Respont : Ha get ho spered !

Kyrie

Gloria : (Stez Anna) Gloria in excelsis Deo (2 wezh) ! In excelsis Deo !

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.

Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhelmeurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr Sofonia

Klaskit an Aotrou, c'hwi holl tud izel ar vro, hag a vir e c'hourc'hemennoù. Klaskit bout santel hag izel a galon, ha marse e vehet espernet da zeiz kounnar an Aotrou. Met lezel a rin er vro ur bobl izel a glasko he goudor e anv an Aotrou : Tud restad Israel, ne raint mui a fallagriez, ne lârint mui a c'hevier, ne vo mui a gomzoù trompus en o genoù. Gellet a rint labourat ha diskuizhiñ hep bout trubuilhet get den.

Setu komz an Aotrou Doue : Bennozh da Zoue !

Psalm 145 : Eürus ar re baour a galon,

rak dezhe eo rouantelezh an Neañv !

An Aotrou a zalc'h d'e c'her da virviken,
'rentiñ a ra justis d'ar re wasket,
bara a roa d'ar re naoniek.

An Aotrou a dorr o chadennoù d'ar brizonidi.

An Aotrou a zigor daoulagad ar re dall,
an Aotrou a zigromm an dud daoubleget,
an Aotrou a gar an dud reizh.

An Aotrou a ziwall ar veajerion.

An Aotrou a sikour ar minour hag an intañvez
met diroudiñ a ra mennadoù an dud fall.

An Aotrou a ren, roue da virviken,
da Zoue, o Sion, a rummad da rummad.

Cil lennadenn :

Lennadenn tennet a lizher kentañ an Apostol Paol d'ar Gorintiz.

Ma breuder, sellit pere a zo bet galvet en ho mesk : n'eus ket anezhe kalz a dud gouziek hervez ar bed, na kalz a dud galloudus, na kalz a dud a liguez uhel. Met dibabet en deus Doue ar pezh a zo diskiant er bed-mañ d'ober mezh d'an dud fur, ar pezh a zo gwann er bed-mañ d'ober mezh d'an den kreñv ; dibabet en deus Doue ar pezh a zo dilignez er bed-mañ, ar pezh a zo disprizet, ar pezh a zo netra evit kas da netra ar pezh a zo anezhañ evit na c'hello den ebet en em veuliñ dirak Doue. Rak, ma oc'h er C'hrist Jezuz eo dre c'hras Doue ; eñ hag en deus lakaet Jezuz da vout evidomp furnezh, reizhted, santetelezh ha daspren, evit ma vo gwir lavar ar Skritur : « Mar faot d'un den bennak en em veuliñ, ra 'n em veulo en Aotrou. » Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Allelouia :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mazhev.

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Aviel : En amzer-hont, Jezuz, é welet ur vostad tud doc'h en heuli, a yas àr ur manez, hag, ur wezh ma oa azezet, e zisiplad a dostaas dezhañ. Neuze en em lakaas da bredeg dezhe en ul lâret :

«Eürus ar re a gar ar baourentez, dezhe-int eo rouantelezh an Neañv.

Eürus ar re a c'houel, rak ma vint konfortet.

Eürus ar re dous, rak int o devo an Douar da lod.

Eürus ar re o deus naon ha sec'hed a Justis, rak e vint gwalc'het.

Eürus ar re trugarezus, rak int ivez a gavo trugarez.

Eürus ar re a zo glan o halon, rak ma welint Doue.

Eürus ar re damboner, rak int a vo anvet bugale Doue.

Eürus ar re o deus trubuilhoù da andur en arben ag ar Reizhder, rak dezhe-int eo rouantelezh an Neañv.

Eürus e vehet-c'hwi a pa vehet añjuliet ha gwallgaset, ha ma vo fallgomzet ac'hanoc'h e gaou abalamour din.

Bezit neuze leun a joa ha diskouezit levezet, rak un digol kaer a zo doc'h ho kortoz en neañv !»

En dibenn : ar beleg : Setu Komz an Aotrou :

R/ : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel :

Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho kani-c'hwi :

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel :

Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an Ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neñv hag an douar : **Hosanna e lein an Ne !**

Ra vo benniget an hani a za e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an Ne !**

Gorreoù : Degas 'reomp da soñj ag ho marv, Aotrou Krist savet da vev,
Ha gortoz a reomp ho tistro.

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.